

AR VERB

LODENN

2





AR VERB : AR STUMM NAC'H

lennadenn

“Mat”, emezi trumm, “poent eo din mont d’ar ger”. Gouzout a raen ne oa ket gwir, rak ne oa ket diwezhat. C’hoant am boa d’he fedañ da chom ganin ur pennad c’hoazh. Ne gredis ket koulskoude. An eil antronoz en em gavis ganti : “Ho tirenkañ a ran marteze”, emezon. “O” emezi “ne rit ket”. “N’emañ ket ho ki bihan ganeoc’h?” “N’emañ ket, chomet eo er ger. Ne felle ket dezhañ dont ganin”.

(diwar Tangi Kerviler - R.HEMON)

goulennoù

Islinennit ar verboù er stumm nac’h. Gant peseurt ger e vez merket an nac’hañ ?

Grit ar goulennoù a glotfe gant pep stumm nac’h a zo e rannbennad kentañ an destenn.

Sellit mat ouzh frazenn ziwedhañ an destenn. Penaos eo savet ar respont d’ar goulenn “N’eman ket ho ki bihan ganeoc’h?”

Sellit c’hoazh ouzh : “ Ho tirenkan a ran marteze?” “O” emezi “ne rit ket”.

kentel

1

Merket e vez an nac'hañ gant **ne ... ket lakaet a bep tu d'ar verb displeget. Dirak ur vogalenn ez a **ne** da **n'**.**

Ne ganont ket mat.

N'eo ket brav an amzer.

2

Lamet e vez **ket pa vez ur ger nac'h er frazenn.**

Ne welan den ebet.

N' eus netra er voest-mañ.

3

Evit respont d'ur goulenn stumm kadarn e ranker pe adkemer verb ar goulenn, pe implij ar verb ober.

Brav eo an amzer ?

N'eo ket.

Te 'oar piv eo ?

Ne ran ket.

4

Pa vez respontet d'ur goulenn stumm nac'h e responter **nann.**

N'emañ ket da gamalad ganit ?

Nann.

N'eo ket fall an amzer ?

Nann.

klaskomp c'hoazh

Sellit mat ouzh ar frazennoù-mañ :

Ne ganont ket mat.

Ar vugale-se ne ganont ket mat.

Ne gan ket mat ar vugale-se.

Ne zeuint ket hiziv.

Ma zud ne zeuint ket hiziv.

Ne zeuio ket ma zud hiziv.

Islinennit ar verboù e pep frazenn. Sellit ouzh urzh ar gerioù en eil hag en trede frazenn. Peur e vez lakaet ar verb el liester? Peur e vez lakaet en unander?

5

Lakaet e vez ar verb el liester pa vez ar rener el liester **dirak ar stumm nac'h. Lakaet e vez ar verb en unander pa vez ar rener el liester **goude** ar stumm nac'h.**

Ar sonerien n'**int** ket deut.

N'**eo** ket deut ar sonerien.

Ar botoù-se ne **blijont** ket din.

Ne **blij** ket din ar botoù-se.

Ar fuzeennoù ne **c'hellont** ket tostaat ouzh an heol.

Ne **c'hell** ket ar fuzeennoù tostaat ouzh an heol.

Sellomp c'hoazh ouzh un nebeud frazennoù :

O kanañ emañ al laboused ?

N'emaint ket.

Laboused zo o kanañ ?

N'eus ket.

Mat eo ar wastell ?

N'eo ket.

Ur wastell a zo er voest ?

N'eus ket.

Tud 'zo ? N'eus ket.

An dud a zo laouen ?

Laouen eo an dud ? N'int ket.

Ur gontell zo ganit ? N'eus ket.

Lemm eo ar gontell ? N'eo ket.

An holl respontoù zo amañ er stumm nac'h, met a-wechoù e vez implijet **emañ**, a-wechoù **eo** pe c'hoazh **eus**. Sellit ouzh ar goulennoù hag islinennit e **ruz** pa vez resis rener ar verb, e **glas** pa vez amresis. Sellit en-dro ouzh ar respontoù ha klaskit sevel ur reolenn hoc'h-unan.

6

Er stumm nac'h e vez implijet emañ pe eo pa vez resis rener ar verb. Pa vez amresis rener ar verb e vez graet gant eus.

Fur eo ar paotr ? N'eo ket.

Ur paotr fur a zo er skol-mañ ? N'eus ket.

Ganit emañ da levr ? N'emañ ket.

Brav eo da levr ? N'eo ket.

Ul levr a zo ganit ? N'eus ket.

poelladennoù

1

Lakit ar frazennoù-mañ er stumm nac'h :

- Da dad a zo o labourat en e vurev.
- Torret eo bet ar marc'h-houarn gant bugale ar skol all.
- Yannig a zo o kanañ er sal-dour.
- Ar c'harr-tan glas a zo dirak ti an archerien.
- Delioù sec'h ar wezenn avaloù a zo bet dastumet.
- Re a draoù a c'houlennet diganin.

2

Respontit en ur implijout ar stumm nac'h.

- O torchañ al listri emañ Fantig?
- O kanañ emañ Per?
- O c'hoari da-unan emañ?
- O neuial emañ da vreur?
- O skrivañ d'ho mamm emañ?
- O kontañ gevier emañ?

3

Hevelep labour:

- Ha laouen out gant da labour?
- Ha kousket out c'hoazh?
- Ha ruz eo da vlev?
- Ha skuizh oc'h gant ar skol?
- Hag hir e oa ar veaj ac'han da Roazhon?
- Ha pomper e vi pa vi bras?

4

Hevelep labour:

Hag ezhomm hoc'h eus eus ar c'hreion-mañ?
Ha desket o deus mat o c'hentel?
Ha skrivet en deus Ifig war e gaier?
Naon ac'h eus?
Plijadur ac'h eus bet?
Naon az po c'hoazh bremaik?

5

Responit en ur implijout ar stumm nac'h :

Alies e sellez ouzh ar skinwel?

Ha beajiñ a rit alies gant an tren?

Ha kanañ a rez brav?

Dont a reot ganin?

Ha chom a raio Lena da zebriñ er c'hantin?

Ha mont a rae Tadig alies d'an aod pa oa bihan?

6

Lakait ar rener e penn ar frazenn nac'h.

- Ne blij ket ar c'hoarioù-se d'am breur.
- Ne vez ket gwisket e ruz ar vicherourien.
- Ne gan ket al laboused e-kreiz ar goanv.
- N'eo ket gwall fur ar vugale hiziv.
- Ne vo ket laouen ma zud o welet an dizurzh.
- N'eo ket eürus al loened gouez er zoo.

**Respontit er stumm nac'h en ur implij emañ
pe eo pe eus.**

Un dra bennak a zo da zebriñ?
Laboused a zo er wezenn-mañ?
Laouen eo al labous-se en e gaoued?
Aze eman da dad?
Er skol emañ ar vugale hiziv?
Bugale a zo er sal-mañ?

8. Dre gomz ha buan, respontit d'ar goulennoù en ur implijout ar stumm nac'h?

Klañv out?
 Toet eo an ti?
 Mat int?
 Mat 'oa ar c'hrampouezh?
 Bet e oac'h en abadenn sonerezh?
 Warc'hoazh e raio glav?
 Torret 'vije bet ar gwer?
 Eno e vezer lojet mat?
 War an daol emañ?
 Ur gontell a zo ganit?
 Gwin a oa ganto war an daol?
 Bez' e vo labour evit an holl?
 Gwelet hoc'h eus anezhañ?
 Kavet en devoa e draoù?
 Un tamm bara ho po?
 Fañch en dije graet?
 C'hwi a yelo ivez?
 Te a zeuio ganeomp?
 Honnezh a ouie se?
 Plijout a ra dit?
 Gwelet a rez ar mor?
 Anavezout a rit anezho?
 Krediñ a rafes lavaret se dezho?
 Deskiñ mat a rae er skol?
 Ar paotr a zeske e gentelioù?
 Tud a zo?
 Kalz tud a oa?
 Bras eo?
 Mat e oa ar boued?
 Ker eo ar botoù-se?

● Debret 'poa an tamm kig?
● Kousket oc'h?
● Lenn a rez?
● Dont a ri?
● Mont a ri?
● D'ar ger ez i?
● Er ger e vi?
● Er ger e oas?
● Erc'h a reas?
● Trawalc'h 'peus bet?
● E kêr emaint?
● Sur eo?
● Labourat a raio da vreur-kaer?
● Debret eo tout?
● Gwin a chom c'hoazh?
● Ouzh taol emaoe'h?
● Bara 'zo?
● Prest eo?
● Skuizh e vezes alies?
● Alies e teuez?
● Alies e teu?
● Tud a vo?
● An den a labourer mat?
● Amañ e kouske?
● Dont a raio?
● Ker eo?
● Mat eo an traoù-mañ?
● Trawalc'h zo?
● Gwelet 'peus egile?
● Plijout a ra dezhañ?

VERB OBER

DOARE DISKLËRIÄN



VERB OBER : DOARE DISKLERIAÑ

lennadenn

Dec'h da noz e raen un dro-vale e kêr gant ma c'heneil Youn. Graet hor boa ur pennadig hent, hag erru dirak ur c'hozh ti dirapar na oa dor ebet warnañ.

- Kae da welet! eme Youn. Marteze e ri ur gavadenn dreist? Me a raio ar ged.

Ur c'hammed a ris en trepas. A-boan 'm boa graet tro ar gegin lous ha teñval ma klevis ur vouezh raouliet :

- Petra 'c'h eus graet amañ?

Lammoù bras a reas ma c'halon em bruched.

- N'em eus graet netra fall!

Ar pikol skeud a chome kuzhet e donder an trepas hir.

Ha me ha soñjal :

- Petra 'rin-me bremañ? Ha petra 'raio hennezh? Ha petra ra Youn er-maez?

Youn n'en devoa ket graet ar ged. Tro an ti en devoa graet...

- A! A! A! Ur farsadenn vrav am eus graet dit! Un hej a ris d'am skoaz.

- Bo! eme Youn. Ne rin ken. Ne rez nemet mouzhañ!



goulennoù

Klaskit holl stummoù ar verb **ober** a gavot en destenn. Istinennit anezho. Evit pep hini, roit an amzer hag ar gour (gant sikour an daolenn displegañ).

Displegadur ar verb ober Amzerioù eeun

AMZERIOÙ EEUN

amzer vremañ

OBER A RAN
OBER A REZ
OBER A RA
OBER A REOMP
OBER A RIT
OBER A REONT
OBER A REER

ME A RA
TE A RA
EÑ/HI A RA
NI A RA
C' HWI A RA
INT A RA

(UN DRO VALE) A RAN
" A REZ
" A RA
" A REOMP
" A RIT
" A REONT
" A REER

amzer amdremenet

OBER A RAEN
OBER A RAES
OBER A RAE
OBER A RAEMP
OBER A RAEC'H
OBER A RAENT
OBER A RAED

ME A RAE
TE A RAE
EÑ/HI A RAE
NI A RAE
C' HWI A RAE
INT A RAE

(UN DRO VALE) A RAEN
" A RAES
" A RAE
" A RAEMP
" A RAEC'H
" A RAENT
" A RAED

amzer da zont

OBER A RIN
OBER A RI
OBER A RAIO
OBER A RAIMP⁽¹⁾
OBER A REOT
OBER A RAINT
OBER A REOR

ME A RAIO
TE A RAIO
EÑ/HI A RAIO
NI A RAIO
C' HWI A RAIO
INT A RAIO

(UN DRO VALE) A RIN
" A RI
" A RAIO
" A RAIMP⁽¹⁾
" A REOT
" A RAINT
" A REOR

amzer dremenet strizh⁽²⁾

OBER A RIS
OBER A REJOUT
OBER A REJAS
OBER A REJOMP
OBER A REJOC'H
OBER A REJONT
OBER A REJOD

ME A REAS
TE A REAS
EÑ/HI A REAS
NI A REAS
C' HWI A REAS
INT A REAS

(UN DRO VALE) A RIS
" A REJOUT
" A REAS
" A REJOMP
" A REJOC'H
" A REJONT
" A REJOD



(1) E Bro-Dreger e vez
lâret:

REFOMP
REFET
REFONT

(2) Alies e vez implijet
an amzer amdrennet e-
lec'h an amzer dremenet
strizh (er yezh komzet)

Amzeriou kevrennek (Verb skoazell: en devout)



**AMZERIOÙ
KEVRENNEK**

amzer vremañ

<p>GRAET AM EUS GRAET EC'H EUS GRAET EN DEUS GRAET HE DEUS GRAET HON EUS GRAET HOC'H EUS GRAET O DEUS</p>	<p>ME AM EUS GRAET TE AC'H EUS GRAET AZ PEUS </p> <p>EÑ EN DEUS GRAET HI HE DEUS GRAET NI HON EUS GRAET C'HWI HOC'H EUS GRAET HO PEUS </p> <p>INT O DEUS GRAET</p>
---	--

amzer amdremenet

<p>GRAET EM BOA GRAET EZ POA GRAET EN DEVOA DOA </p> <p>GRAET HE DEVOA DOA </p> <p>GRAET HOR BOA GRAET HO POA GRAET O DEVOA DOA </p>	<p>ME AM BOA GRAET TE AZ POA GRAET EÑ EN DEVOA GRAET DOA </p> <p>HI HE DEVOA GRAET DOA </p> <p>NI HOR BOA GRAET C'HWI HO POA GRAET INT O DEVOA GRAET DOA </p>
---	--

(1) E-lec'h: am eus
ach'eus
...
ar yezh komzet a implij,
a-wechoù:

'MEUS
'TEUS (pe PEUS)
'NEUS
'DEUS
'MEUMP (pe BEUS)
'PEUS
'DEUS

(2) E-lec'h: em boa
ez poa
...

ar yezh komzet a implij
a-wechoù:

'MA
'TA (pe 'PA)
'NA
'DA
'MAMP (pe 'BA)
'PA
'DA

poelladennoù

1 Leugnit ar frazennoù-mañ en ur implij ar verb **ober** d'ar gour ha d'an amzer a zere: (U = unan, L = lies)

- Warc'hoazh ur bourmenadenn hir (1 U)
 Ul lizher deoc'h ar miz tremenet (1 U)
 Bemdez re a drouz er c'hlas (3 L)
 Ur pennad kousk pa voe dihunet gant ar c'hloc'h (3 U)
 Un dro-vale plijus ar mintin-mañ (1 L)
 ho labour? (2 L)

2

Respontit d'ar goulennoù er stumm kadarn :

- Ur gouignenn vat hoc'h eus graet deomp?
- Ober a rit ar veaj-se alies?
- Sotonioù a rae Tadig pa oa bihan?
- Ur sae nevez a rin dit gant an danvez-se?
- Droug en devoa graet ar c'hi dit en ur lammat?
- Graet hoc'h eus aon d'ho preur c'hoazh?

3

Krogit ar frazennoù gant ar gerioù livet e glas :

- Me 'ra ma labour **buan** a-raok mont da c'hoari.
- Mammig a raio **ur pred saourus** gant an togoù-touseg.
- Ur ganaouenn nevez a raimp **diwar-benn ar vakañsoù**.
- Ur pennadig hent a reot **ganeomp** .
- Ul lizher hir a raent **bemdez** d'o mamm-gozh.
- Graet ho peus anaoudegezh ganto **pell 'zo**?

Lakait ar pennadig-mañ en amzer da zont,
en amzer amdremenet, en amzer vremañ kevrennek
(e-lec'h hiziv e vo lakaet **warc'hoazh**, **bremaik**, **ar mintin-mañ**,
warlene ...)

Hiziv ne ran netra evel boaz. Ha c'hwi, petra 'rit hiziv? Labour vat
a rit, traoù plijus a rit?

–Ya! Ober a reomp sport, ober a reomp tresadennoù,
Merc'hodennoù a reomp ivez. Dañsal a rae ar re vihan. Ur bern
traoù a reont.

15

VERB BEZAŇ

DOARE DISKLËRIAN



VERB BEZAÑ : DOARE DISKLERIAÑ

Iennadenn

DAO! DAO! Unan a zo o skeiñ ouzh an nor. Me a zo em gwele.

— Pelec’h emhout Erle?

— Em gwele emeon. Piv eo?

— Naig eo! Klañv out? Alies e vezez klañv!

— Ya, klañv on. Deus emañ!

— Ouuuh! Uhel eo an diri! Te zo klañv, neuze?

Ne vi ket gwelet er skol warc’hoazh kennebeut?

— Marteze e vin pareet! Ha da vreur, pelec’h emañ?

— Er gêr emañ ivez. Ne vez morse o labourat d’ar Yaou. Ha da dad, pelec’h eman?

— E Roazhon emañ ma zad. Bep Yaou e vez e Roazhon, er skol-veur. Ma mamm zo e Kemper. Dec’h edo e Brest, ha warc’hoazh e vo e Montroulez. Skuizh eo gant an hent!

— Ale! Diwezhat eo, d’ar skol emeon o vont.



goulennoù

Klaskit holl stummoù ar verb bezañ en diviz-se.

Klaskit peur e vez implijet ar stummoù

emañ, emaout, ...

vez, vezez, ...

eo, a zo, ...

Keñveriit “*Me zo em gwele*” hag “*Em gwele emeon*”.

Displegadur ar verb bezañ

STUMM
LEC'HIAN



(1) En diavaez eus Bro-Leon ne vez implijet nemet **emañ** hag **emaint** gant ar yezh komzet.

(2) En diavaez eus Bro-Leon ne vez ket implijet ken gant ar yezh komzet.

(3) Er yezh komzet, an Dregeriz a ra alies gant :
'VEFOMP
'VEFET
'VEFONT

(4) Alies e vez implijet an amzer amdremenet en e blas.

amzer vremañ

FUR ON
FUR OUT
FUR EO
FUR OMP
FUR OC'H
FUR INT
FUR EUR

ME ZO FUR
TE ZO FUR
EÑ/HI ZO FUR
NI ZO FUR
C' HWI ZO FUR
INT ZO FUR

(1)
(EN TI) EMAON
" EMAOUT
" EMAÑ
" EMAOMP
" EMAOC'H
" EMAINT
" EMEUR

amzer amdremenet

FUR E OAN
FUR E OAS
FUR E OA
FUR E OAMP
FUR E OAC'H
FUR E OANT
FUR E OAD

ME A OA FUR
TE A OA FUR
EÑ/HI A OA FUR
NI A OA FUR
C' HWI A OA FUR
INT A OA FUR

(2)
(EN TI) EDON
" EDOS
" EDO
" EDOMP
" EDOC'H
" EDONT
" EDOD

amzer da zont

FUR E VIN
FUR E VI
FUR E VO
FUR E VIMP⁽³⁾
FUR E VIOT
FUR E VINT
FUR E VIOR

ME A VO FUR
TE A VO FUR
EÑ/HI A VO FUR
NI A VO FUR
C' HWI A VO FUR
INT A VO FUR

amzer dremenet strizh⁽⁴⁾

(EN TI) E VOEN
" E VOES
" E VOE
" E VOEMP
" E VOEC'H
" E VOENT
" E VOED

ME A VOE FUR
TE A VOE FUR
EÑ/HI A VOE FUR
NI A VOE FUR
C' HWI A VOE FUR
INT A VOE FUR

STUMM
BOAZ

amzer vremañ⁽¹⁾

FUR E VEZAN
FUR E VEZEZ
FUR E VEZ
FUR E VEZOMP
FUR E VEZIT
FUR E VEZONT
FUR E VEZER

ME A VEZ FUR
TE A VEZ FUR
EÑ/HI A VEZ FUR
NI A VEZ FUR
C' HWI A VEZ FUR
INT A VEZ FUR

amzer amdremenet⁽²⁾

FUR E VEZEN
FUR E VEZES
FUR E VEZE
FUR E VEZEMP
FUR E VEZEC'H
FUR E VEZENT
FUR E VEZED

ME A VEZE FUR
TE A VEZE FUR
EÑ/HI A VEZE FUR
NI A VEZE FUR
C' HWI A VEZE FUR
INT A VEZE FUR

amzer da zont⁽³⁾

FUR E VEZIN
FUR E VEZI
FUR E VEZO
FUR E VEZIMP
FUR E VEZOT
FUR E VEZINT
FUR E VEZOR

ME A VEZO FUR
TE A VEZO FUR
EÑ/HI A VEZO FUR
NI A VEZO FUR
C' HWI A VEZO FUR
INT A VEZO FUR



(1) Ne vez distaget ar **-z** nemet e Bro-Leon.

(2) E Bro-Leon e vez distaget ar **-z**.
E lec'h all ne vez ket distaget peotramant e vez distaget peotramant e vez distaget "j"

(3) Ne vez distaget al lizherennoù **-ez** nemet e Bro-Leon.

kentel

1

Ar stummoù **on**, **out**, **eo**... hag ar stummoù me zo, te zo... a vez implijet gant anvioù-gwan pe anvioù a servij da zoareañ.

on, out, eo... a vez implijet pa ne vez ket merket ar rener en ur mod all. **zo** a vez implijet pa vez ar rener dirak ar verb. **eo** a vez implijet pa vez goude ar verb.

Klañv on.

Laouen int.

Me zo skuizh.

Lanig zo ur paotr mat.

Lanig eo ar paotr-se.

2

Ar stummoù dre **vez** a vez implijet da verkañ ur fed a c'hoarvez alies, a-wechoù, ingal. Anvet eo ar **stumm boaz**.

Bemdez e vezan skuizh goude an devezh skol.

Alies e vezez klanv !

Ar vugale a vez atav o c'hoarzhin.

Ar stummoù **emaon, emaout...** a vez implijet

- da verkañ ul lec'h,

- da verkañ an ober gant **o + anv verb**

Er ger emaon hiziv.

Pelec'h emaout ?

O c'hoari ar c'hanetennou emaint.

O tebriñ merenn emaoc'h ?

poelladennoù

1

Lakait ar frazennoù-mañ :

A) en amzer da zont

B) en amzer amdremenet

K) er stumm nac'h.

- Trist out o welet an amzer-se.
- Laouen int o c'hoari asambles.
- Er gêr emañ hiziv.
- Sot eo an den-se!
- Ul levr a zo war an daol.
- Al lapin a zo en e gaoued.
- Brav eo an amzer hiziv.
- O skrivañ ul lizher emañ.
- N'int ket re skuizh.
- N'emaomp ket o livañ gevier.
- Ar bloaz-mañ e vezan klañv alies.

2

Lakait ar frazennoù-mañ da gregiñ gant ar rener.

- O pourmen war vord an aod emañ.
- Emañ ar vugale o c'hoari war ar porzh.
- Er gêr emañ Yannig en e wele.
- Pegoulz emañ merenn ?
- N'emañ ket va zad er gêr.
- Petra emaooc'h oc'h ober ?
- Plijus eo ar c'hoari nevez-se.
- Gwisket tomm on gant ma chupenn lêt.
- Diaes eo al levr-se da gompren.
- Sot out oc'h ober kement a drouz !

3

Krogit ar frazennoù-mañ gant "me 'gred".

- Ar vugale a zo o c'hoari war porzh.
- Echu eo ma labour noz.
- Yannig a zo en ospital.
- Brec'h Yannig a zo torret.
- Kastell Tonkedeg a zo e-kichen ar bourk.
- Pell emañ Brest diouzh Naoned.

4

Krogit ar frazennoù-mañ gant “me ‘gred”.

- Blev ma mamm-gozh a zo gwenn abaoe pell 'zo.
- Mona a zo kousket-mik.
- Ar voutailhad dour a zo er yenez.
- An dorzh vara a zo war an daol.
- Yannig a zo o labourat en e gambr.
- Lommig a zo o reiñ boued d'e gazh.

5

Leugnit an touloù gant “a vez” pe “a zo”:

- Mona klañv hiziv; n'eo ket deuet ganeomp.
- An amzer fall alies e-pad ar goanv.
- An dud o pourmen war an aod d'ar sul.
- Da dad melen e vlev.
- Ma zad skuizh goude e zevezh labour.
- An devezh skol echuet da beder eur hanter.

6

Krogit ar frazennoù-mañ gant “alies”:

Me a vez alies o labourat em c’hambr.

Ni a vez alies o labourat ouzh taol ar gegin.

Yannig a vez alies o kanañ e saozneg.

Int a vez alies gwisket e ruz ha c’hwi a vez gwisket e glas.

C’hwi a vez alies o kanañ tra ma labourit.

Te a vez ruz da zivjod goude bezañ c’hoariet er-maez.

7

Adsavit ar frazennoù-mañ en ur lakaat “gwechall” e-lec’h ar gerioù a verk an amzer vremañ:

Bremañ e vez boued a-walc’h en ti-mañ.

O studiañ brezhoneg e vezont ar bloaz-mañ.

El labouradeg-mañ e vez ma zad o labourat bremañ.

A-hed an deiz e vez al laboused o kanañ.

Betek hanternoz e vez o labourat er mare-mañ.

Bep Sadorn e vez serr an ti-bank.

VERB EN DEVOUT (KAOUT)

DOARE DISKLËRIÃÑ



VERB EN DEVOUT : DOARE DISKLÊRIAÑ

lennadenn

— Yann, petra 'c'h eus bet d'an Nedeleg?

— Ur bern profoù 'm eus bet: ur c'harr,
ur fuzeenn, ur voestad chokolad... Pemp levr...

— Ha me, me 'm eus bet ur vergodenn a oar
komz, ur marc'h-houarn, levrioù... ha n'ouzon
ket petra c'hoazh.

— Warlene em boa bet muioc'h a draoù
c'hoazh!

— Marteze ez po nebeutoc'h ar bloaz a zeu!
Ha da vreur, petra en deus bet?

— Traoù babigoù en deus bet, met ma c'hoar
he deus bet ur gwele nevez! Ha me am bo unan
evit ma deiz-ha-bloaz!

— Ma breur ha me hor bo ur gwele gant daou
live!!!

goulennoù

Klaskit holl stummoù ar verb **en devout** en destennig-se. Keñveriit gant taolenn an displegadur. Gwelet a reot eo krennet stummoù 'zo. Pere? Daoust ha gwelet a rit un diforc'h etre stummoù skrivet an daolenn hag ar re a glevit bemdez tro-dro deoc'h? Daoust hag ur rener a zo da bep verb en destenn-mañ? Daoust hag un diforc'h a zo e displegadur ar verb hervez ma vez ur rener pe get?

klaskomp

Keñveriomp:	Ul levr a lennan	Ul levr am eus
	Ul levr a lennomp	Ul levr hon eus
	Ul levr a lennint	Ul levr o do
	Ul levr a lennez	Ul levr az poa

Penaos e vez merket ar gour en ur verb reizh evel **lenn**? An amzer? Penaos e vez merket ar gour hag an amzer er verb **en devout**?

kentel

1

Ur stumm disheñvel a zo da bep gour pa vez ar rener dirak ar verb zoken.

Ar vugale o deus poan.

Poan o deus ar vugale. Poan o deus.

Me am eus poan. Poan am eus.

Ar plac'h he deus poan. Poan he deus ar plac'h.

Poan he deus.

2

En trede gour unan e vez merket ar reizh.

Ma c'hoar he deus ur vantell ruz.

Ma breur en deus unan c'hlas.

Merket e vez ar gour gant lodenn gentañ ar stumm verbel (am, ac'h, en...)

3

En eil lodenn e vez kavet merk ar gour hag hini an amzer war an dro (eus, deus, boa, poa, devoa...)

Displegadur ar verb en devout (kaout)



E-lec'h
 AM EUS
 ACH EUS
 ...
 e vez lâret, peurliesañ
 MEUS
 TEUS
 NEUS
 DEUS
 MEUMP (pe BEUS)
 PEUS
 DEUS

Ha memes mod e vez
 graet en holl amzerioù.
 Da skouer:
 MO
 TO
 NO
 e-lec'h
 AM BO
 AZ PO
 EN DO

STUMM
 BOAZ

amzer vremañ

(AON) AM EUS
 " |AC'H EUS|
 |AZ PEUS|
 " EN DEUS
 " HE DEUS
 " HON EUS
 " |HOC'H EUS|
 |HO PEUS|
 " O DEUS

amzer vremañ

(AON) AM BEZ
 " AZ PEZ
 " EN DEVEZ
 " HE DEVEZ
 " HOR BEZ
 " HO PEZ
 " O DEVEZ



amzer amdremenet

(AON) AM BOA
 " AZ POA
 " |EN DEVOA|
 |EN DOA|
 " |HE DEVOA|
 |HE DOA|
 " HOR BOA
 " HO POA
 " |O DEVOA|
 |O DOA|

amzer amdremenet

(AON) AM BEZE
 " AZ PEZE
 " EN DEVEZE
 " HE DEVEZE
 " HOR BEZE
 " HO PEZE
 " O DEVEZE

amzer dremenet strizh

(AON) AM BOE
 " AZ POE
 " |EN DEVOE|
 |EN DOE|
 " |HE DEVOE|
 |HE DOE|
 " HOR BOE
 " HO POE
 " |O DEVOE|
 |O DOE|

amzer da zont

(AON) AM BO
 " AZ PO
 " |EN DEVO|
 |EN DO|
 " |HE DEVO|
 |HE DO|
 " HOR BO
 " HO PO
 " |O DEVO|
 |O DO|

poelladennoù

1

Leugnit an toulloù gant ar verb en devout en amzer
vremañ :

- Un tog du hag unan ruz ma mamm-gozh.
- Ma breur ne zeuio ket d'ar skol, poan gof
- Me a-walc'h a arc'hant da brenañ al levr-se.
- Amzer ar vugale da c'hoari e-pad an ehan.
- Skuizh-dall on ha kalz d'ober c'hoazh.
- Arabat deoc'h diskouez aon rak ar c'hi.

2

Lakait an hevelep frazennoù en amzer amdremenet

3

Leugnit:

- Dec'h ar vugale togoù ha mantilli.
- Gwechall un hent hir da vont d'ar skol.
- Me ur marc'h-houarn ruz pa oan bihan.
- Ma zad poan-benn dec'h o tistreiñ eus e labour.
- Yuna blev berr warlene.
- Ur vicher vat!
- Perak hoc'h eus kuitaet anezhi?

4

Lakait ur rener da bep stumm verbel:

..... he deus ur pezh mell ki du.

..... o deus re a c'hoarielloù.

Naon en deus o tistreiñ eus e valeadenn.

Plijadur he devoa bet o selaou kanaouennoù nevez.

Keuz o devo na labouront ket er skol.

..... hon eus chans!

VERB KANAŇ

DOARE DISKLËRIAŇ



VERB KANAÑ : DOARE DISKLÊRIAÑ

DISPLEGADUR AR VERB REIZH KANAÑ



(1) Diskleriet hon eus stummoù komzet ar verb kaout er bajenn 137.

AMZERIOU
EEUN

amzer vremañ

UN TON NEVEZ A GANAN
" A GANEZ
" A GAN
" A GANOMP
" A GANIT
" A GANONT
" A GANER

amzer amdremenet

UN TON NEVEZ A GANEN
" A GANES
" A GANE
" A GANEMP
" A GANEC'H
" A GANENT
" A GANED

amzer dremenet strizh⁽²⁾

UN TON NEVEZ A GANIS
" A GANJOUT
" A GANAS
" A GANJOMP
" A GANJOC'H
" A GANJONT
" A GANJOD

amzer da zont⁽²⁾

UN TON NEVEZ A GANIN
" A GANI
" A GANO
" A GANIMP⁽³⁾
" A GANOT
" A GANINT
" A GANOR

AMZERIOU
KEVRENNEK

amzer vremañ⁽¹⁾

KANET 'M EUS
KANET 'C'H EUS
AZ PEUS
KANET EN DEUS
KANET HE DEUS
KANET HON EUS
KANET 'HOC'H EUS
HO PEUS
KANET O DEUS

amzer amdremenet⁽¹⁾

KANET EM BOA
KANET EZ POA
KANET EN DEVOA
KANET HE DEVOA
KANET HOR BOA
KANET HO POA
KANET O DEVOA



(2) Er yezh komzet e vez alies implijet an amzer amdremenet en e blas.

(3) E Bro-Dreger :
A GANEFOMP
A GANEFET
A GANEFONT

kentel

1

En daolenn e vo kavet an displegadur **personel**. Merket eo ar gour e dibenn ar verb.

Daou seurt displegadurioù a gaver c'hoazh :
1. an displegadurioù **diberson**, merket e vez ar gour gant ur ragnav pe gant ur rener all:

Me a gan, ni a gan, ar paotr a gan.

2. an displegadur **gant skoazell ober**.

Kanañ a ran, kousket a ran, lenn a ra...

2

Ur verb reizh eo ar verb kanañ. An hevelep dibennoù a vez en holl verboù, nemet:

mont

ober

gouzout

bezañ

en devout (kaout)

poelladennoù

3

Lakait en amzer da zont

Ni a zañse e-pad an noz.
Debriñ a reont fonnus.
Ul levr nevez a brenez.
Sioul e kerzhit.
Er gwele-se e kouskan mat.
Ma c'hazh a gav mat al laezh.
Ne livomp ket ar mogerioù.

3

Lakait en amzer vremañ :

- Ul levr hir a lennin.
- An nor a serrent.
- Ar vugale a gousko abred.
- Harzhal a rae ar c'hi.
- Ur wastell vat a zebres.
- Ne welimp ket ac'hanout.

3

Lakait en amzer amdremenet kevrennek:

- Echuët 'm eus da levr.
- Dañset o deus a-hed an noz.
- Skrivet hoc'h eus re vras.
- Selaouet en deus ar c'heleier.
- Kanet hon eus ur ganaouenn vrav.
- Troc'het he deus he blev.
- N'ec'h eus ket selaouet.

4

Lakait:

- A) ar rener e penn ar frazenn**
- B) ar renadenn-dra e penn ar frazenn**
- K) an anv-verb e penn ar frazenn**
- D) ar verb gant an displegadur personel.**

da sk. : Ar vugale a zesk ur ganaouenn.

Ur ganaouenn a zesk ar vugale.

Deskiñ a ra ar vugale ur ganaouenn.

Ur ganaouenn a zeskont.

ar paotr / debriñ / un tamm bara

ma mamm / heskennañ / ur geuneudenn

Yann / selaou / sonerezh jazz

Mona / evañ / ur banne dour

ar beajour / dougen / ur samm ponner

an avel / devañ / delioù ar gwez


ar glav / treuziñ / e vantell

5

Implijit an holl verboù-mañ en ur frazenn verr gant:

renadenn-dra + verb.

N'ankouait ket!!! Ur c'hemmadur a zo
war ar verb goude ar rannig a!!!



a zeu da vezañ

- Dañsal (1 U)
- Treñ (3 L)
- Debriñ (2 U)
- Lenn (3 L)
- Evañ (1 U)
- Echuiñ (2 U)
- Karout (1 L)
- Troc'hañ (2 U)
- Gervel (3 U)
- Disoñjal (2 L)
- Drailhañ (3 U)
- Gwelout (1 U)
- Mastariñ (2 U)
- Selaou (3 L)
- Tresañ (1 U)
- Prennañ (2 1)
- Teurel (3 L)
- Rannañ (2 U)
- Livañ (3 U)
- Deskiñ (2 U)
- Naetaat (1 L)
- Malañ (2 U)
- Bruzunañ (3 L)
- Merzout (1 U)
- Prenañ (3 U)
- Gwerzhañ (3 L)
- Sevel (2 U)
- Flourañ (1 U)
- Anavezout (2 L)



AN DOARE GOURC'HEMENN

lennadenn

“Mat-tre” eme ar Paotr en ur vousec’hoarzhin. “Ec’h an bremañ da sevel un itrikadenn gant archerien an Arzhanav evit ma vefe un taol roued dispar. Kit kuit ac’halen bremañ”. Emaint o vont etrezek ar strouezh pa gemenn Cynthia: “Deomp dre an hent, tudoù!” Chom a ra ar pevar all da sellet outi ... “Kerzhit dre an hent m’hoc’h eus c’hoant, met me ...”

“Ronan, serrit ho peg ha lakait ho revr da breg!” a droc’h Cynthia.

“Daoust piv zo a-du evit ma ’c’h afemp ...” a grog Yannig.

“O! Stouvit ho forn!” eme Vanora. “Emañ ar gwir gant Cynthia. Deomp dre an hent, da gomañs.”

(diwar Ar gañfarted hag al louarn kamm -Y. GERVEN)

goulennoù

Klaskit holl stummou an doare gourc’hemenn, an holl stummou a ro urzh d’ober un dra bennak. Peseurt dibennoù zo gant ar verb en doare gourc’hemenn? Unan all a anavezit?

kentel

Displegadur an doare-gourc'hemen:

	KANAÑ	OBER	BEZAÑ	MONT
eil gour unan	KAN	GRA	BEZ	KAE
kentañ gour lies	KANOMP	GREOMP	BEZOMP	EOMP
eil gour lies	KANIT	GRIT	BEZIT	IT/KIT

Ur stumm all a gavot ur wech ar mare. An dibenn anezhañ: **-et**

Trede gour unan BEVET BREIZH!

poelladenn

1

Implijit an doare gourc'hemenn evit reiñ an urzhioù roet
etre krommelloù :

(Kemenn a ran d'am breur dont) amañ Yann!

(Ar skolaerez a c'hourdrouz ar vugale) sioul, bugale ha
..... ho labour!

(Echu ar pred, Yann a grog da ganañ hag a lavar d'ar re all)
..... asambles bremañ!

(Ma c'hoar vihan a chom peg ouzhin) pelloc'h 'ta!

(Servijet eo ar soubenn) da soubenn 'ta, Fanc'h!

(Yen eo er-maez, ar vugale a ya da c'hoari) ho mantilli!

(Emañ ar vanifestourien o huchal luganioù) ar frankiz!

(War vord an hent a-raok treuziñ) mat, Yann, a-raok
treuziñ!



AN DOARE DIVIZOUT

lennadenn

— Ne fell ket din bezañ ur gaouenn ken, ha nebeutoc'h c'hoazh ur gaouenn Indez! ...

— Petra 'garfes bezañ neuze, ma boulig pluñv?

— N'ouzon ket re ma-unan, a valbouzas Choucha; me... me a garfe kaout pluñv hir evel ar paun ha re a bep seurt liv evel ar c'holibri ha me a garfe kaout divaskell kreñv evel an erer.

...

Kement-se n'hall ket bezañ, eme ar vamm, ne c'heller ket cheñch neuz, nemet dre e soñj e vefe.

(diwar *An tigr ne felle ket dezhañ bezañ tigr ken*)

goulennoù

Klaskit hag islinennit ar stummou verb a zo o dibenn – fe, –fes...

Petra a ziskouez ar stummoù-se, a gav deoc'h?

Daoust hag anavezout a rit un dibenn verb all gant ur ster damheñvel?

klaskomp c'hoazh

Er frazennoù-mañ da heul e welot ez eus daou zibenn-verb en doare divizout *-fe* ha *-je*.

Klaskit perak e vez graet gant an eil pe egile.

Mar befe brav an amzer goude merenn, ez afen a-walc'h da bourmen.

Mar bije bet brav an amzer e vijen aet d'ho kwelet.

Me 'gav din e karfe mont da veajiñ dre ar bed.

Me 'gave din e karje mont da veajiñ dre ar bed.

Chom a rafen ganeoc'h gant plijadur.

Chom a rajen ganeoc'h hogen labour am eus da echuiñ.

Warc'hoazh 'vo ur sirk war ar blasenn. C'hoant am befe da vont gant ar vugale.

Dec'h e oa ur sirk met ne ouien ket. 'Mod all e vijen aet gant ar vugale.

kentel



E Bro-Wened hag e Bro-Oueloù e vez graet gant an dibenn **-he** e -lec'h **-fe**.



E Bro-Wened e vez graet gant an dibenn **-ze** e-lec'h **-je**.

1

An doare-divizout a vez merket gant an dibenn **-fe**

- evit komz a-zivout un dra **a c'hell bezañ** en amzer vremañ pe en amzer da zont.



Mont a rafen a-walc'h d'ho kwelet warc'hoazh.

Laouen e vefen ouzh ho kwelet.

Ma 'z afen da vale e teufec'h ganin ?

2

An doare-divizout a vez merket gant an dibenn **-je**

- en amzer dremenet
- evit komz a-zivout un dra **na c'hell ket bezañ** pe un dra **diwirion**.



Aet e oan da welet hag er gêr e vijes.

Krediñ a raemp o dije kanet gwelloc'h.

poelladennoù

1

Er pennadig-mañ, islinennit an holl stummoù en doare divizout

A) e ruz ar re a verk un dra a c'hell bezañ

B) e glas ar re a verk un dra dic'hallus.

- Mont a rafen a-walc'h da bourmen pa vo echu an devezh skol. Dont a rafec'h ganin?
- Me 'garje mont ivez nemet re a labour am eus. Disul ez afen ganeoc'h d'ober un tamm tro!
- Lavarout a ran atav : ma vijen bet pinvidikoc'h em bije ehanet gant ar vicher-se. Ha c'hoazh, n'eus ket da glemm! Penaos e rajemp ma vijemp klañv?

2

Leugnit an toullou en ur lakaat ar verboù en doare divizout.

- Pegen brav (**bezañ**) mont da neuial hiziv!
- Ar vugale (**labourat**) gwelloc'h ma (**bezañ**) uheloc'h an taolioù.
- Me (**karout**) mont da Vro-Gembre e miz Eost.
- Me 'grede (**dont**) ma zad d'am c'herc'hat.
- Ne (**plijout**) ket dit dont da vro Euskadi ganin?
- Forzh pegen skuizh (**bezañ**) ma c'hi, e (**reddek**) c'hoazh.

3

Savit ur pennadig-skrid o kregiñ evel-henn (grit gant an doare divizout par ma c'hellot):

Pa vin bras em befe c'hoant bezañ moraer. Ur vag vras am befe ...

AN ANV-VERB

AN ANV-GWAN-VERB



AN ANV-VERB AN ANV-GWAN-VERB

lennadenn

An dud er sal-debriñ ne voent ket plijet muioc’h. Koulskoude an “teddy boy” ne oa ket lous, ha ne seblante ket bezan diseven. Azezañ a reas hep ur ser e-kichen e vadoberourez. Frañsez a voe karget da rannañ ar wastell, pezh a ouie ober dispar. Rannañ ur wastell en unnek tamm n’eo ket aes. Gontran a voe lakaet da dreiñ kein... Ulali a voe galvet da zont da gaout he zamm. Dont a reas, du he fenn. Gwin dous a voe diskennet gant Herve er gwerennoù, ha pep hini ha kregiñ da zebriñ e damm.

(Ho kervel a rin en noz - R. Hemon)

goulennoù

Klaskit hag islinennit an holl anvioù-verb en destenn-mañ. Peseurt dibenn a welit dezho? Reoù all a anavezit? Pere? Klaskit ivez an anvioù-gwan-verb. Pe dibenn o deus holl? Kemerit ho kerriadur ha klaskit anvioù-verb oc’h echuiñ gant:

añ, iñ
el, al
out



Evit verbou 'zo eo disheñvel ar bennrann en displegadur hag en anv-verb (ar bennrann a vez roet gant trede gour unan an amzer vremañ).

kentel

1

Savet e vez an anv-verb gant ar bennrann hag un dibenn.

an anv-verb an anv-gwan-verb

kanañ..... kanet
debrin debret
harzhal..... harzhet
anavezout..... anavezet
teurel taolet
klemm klemmet



2

Un anv gwirion eo an anv-verb a c'heller lakaat ur ger-mell dirazañ. Implijet e vez an anv-verb :

- 1) da sevel ar **stumm war ober**
- 2) da sevel an displegadur gant ar verb skoazell **ober**.

Al livañ hag an tresañ a blij din.

Oc'h ober petra emaout ?

O tresañ emañ.

Me zo o tresañ.

Kanañ a ran.

Huchal a reas.

Savet e vez an anv-gwan-verb gant pennrann ar verb + an dibenn **-et**.

Implijet e vez an anv-gwan-verb gant ar verboù skoazell **bezañ** pe **en devout** evit sevel an amzerioù **kevrennek**.

anv - verb	pennrann	anv - gwan - verb
KANAÑ SERRIÑ C'HOARZHIN KOUSKET GERVEL TREIÑ MONT OBER ...	KAN SERR C'HOARZH KOUSK GALV TRO A GRA ...	KANET SERRET C'HOARZHET KOUSKET GALVET TROET AET GRAET ...

poelladennoù

1

Klaskit en ur geriadur an anvioù-verb kuzhet er frazennoù-mañ dindan o stummoù displeget:

- Dour fresk a blij din, ul litrad a evan bemdez.
- Warc'hoazh ez in d'ar skol gant ma marc'h-houarn.
- Taolet hon eus ar paperoù lous er pod-lastez.
- Bemdez e savan da eizh eur.
- Me 'oar mat ma c'hentel istor evit hiziv.
- Perak ne zeufes ket ganeomp?

2

Savit c'hwec'h frazenn diwar skouer houmañ:

O c'hoari emañ ma breur.

en ur implij ar gerioù roet deoc'h.

- Dañsal / me
- Evañ / ur banne / ma zad
- Kousket / en e wele / Yann
- Digeriñ / an nor / te
- Kregiñ / gant ho labour
- Labourat / ni

3

Adlavarit ar memes tra en ur implij an displegadur gant skoazell ar verb ober.

4

**Lakait ar frazennoù-se war ar patrom:
C'hoariet en deus ma breur.**



TU-GRA

HA TU-GOUZAÑV

21



TU-GRA HA TU-GOUZAÑV

lennadenn

1. Kelc’hiet eo an enezenn gant ar mor.
2. Bemdez e vez prenet bara ganin.
3. Prenañ a ran bara bemdez.
4. Anavezet mat eo Alan Stivell.
5. He malizenn a vo kaset gant Maela betek ar skolaj.
6. Maela a gaso he malizenn betek ar skolaj.
7. Skubet eo bet ar c’hlas gantañ.
8. Debret e vo merenn gant ar vugale diouzhtu.
9. Skubet en deus Bernez ar c’hlas.
10. Ul logodenn a vez tapet gant ma c’hazh bemdez.
11. Bemdez e tap ma c’hazh ul logodenn.

goulennoù

Islinennit e **glas** ar rener e pep frazenn. E peseurt frazennoù eo kaset an ober en-dro gant ar rener? E peseurt frazennoù eo gouzañvet an ober gant ar rener?

Islinennit e **ruz** ar verb e pep frazenn. E peseurt frazennoù ez eus bet implijet stummoù eus ar verb bezañ?

kentel

1

daou du zo e brezhoneg:
an tu-gra: ar rener eo a gas an ober en-dro.

Prenañ a ran bara bemdez (*rener kuzh: me*)

Maela a gaso he malizenn betek ar skolaj.

an tu-gouzañv: kaset e vez an ober en-dro gant unan all, gant un dra all ; ar rener a c'houzañv an ober, a rank tremen diouzh an ober.

Kelc'hiet eo an enezenn gant ar mor.

Bemdez e vez prenet bara ganin.

2

Savet e vez an tu-gouzañv en ur implij stummoù eus ar verb **bezañ.**

Ar vugale a zebro merenn diouzhtu. (*tu-gra*)

Debret e vo merenn gant ar vugale diouzhtu (*tu-gouzañv*)

poelladennoù

1

Tremen en tu-gouzañv:

- Ar c'hi a zebr un askorn bemdez.
- Evañ a ra ar c'hi ur banne dour.
- N'anavezez ket Lom ar c'haner?
- Ma zad a breno un ti a-raok pell.
- Tud Karaez n'anavezont ket ar mor.

2

Tremen en tu-gra:

- Savet ez eus bet un hent gant al labourerien.
- Alan Stivell zo anavezet mat gant ar Vretoned.
- Bemdez e vez evet laezh amañ.
- Sistr a vez evet ganin gant ar c'hrapouezh.
- Ne vez graet nemet sotonioù gant Yann.

3

Evit pep frazenn, merk hag-eñ emañ en tu-gouzañv pe en tu-gra:

- Kalz a besked zo bet paket gant ar vartoloded hiziv?
- Mont a rin ganeoc'h.
- Ar c'hleier a glevan bep beure.
- Bemdez e vez klevet ar c'hog o kanañ.
- Ar c'hi a oa bet o pourmen gant e vestr.
- Bep beure e vez pourmenet e gi gantañ.